

44596

AIRS

DES

CANTIQUES BRETONS

DU DIOCÈSE

DE QUIMPER ET DE LÉON



B
264.
47
CAN

QUIMPER,
J. SALAUN, LIBRAIRE

1914






Permis d'imprimer :
Quimper, le 28 août 1891,
E. FLEITER,
vic. gén.


RENNES. — IMPRIMERIE DE H. VATAR.



TONIOU KANTIKOU

ESKOPTI KEMPER



N. 1. 
M'hoc'h ador, ma Doue, ma c'hrouer,

M'hoc'h ador, Jezuz, ma Zalver; Hirio ha

keit ha ma vevinn Ho servi-cha humbl a

fell d'in.

N. 2. 
O Tad, Mab ha Speret-Santel, Me

gred oc'h eunn Doue e-ternel, Krouer ann

oll partout prezant, Me hoc'h ador devo-

tamant.

N. 5. $\frac{3}{8}$
bis. $\frac{8}{8}$

En em gonzolit, evit mad, Rouanez
euz ann Envou; Sec'hit pelloc'h ho taou-
lagad Hag arre-tit ho taelou; Resusi-tet
ez eo ho mab Leun a c'hloar, a driom-
phou. Allelu-ia, al-lelu-ia, al-lelu-ia, al-
lelu-ia.

N. 6. $\frac{3}{8}$
 $\frac{8}{8}$

Ni ho salud gant karantez, Roua-
nez ar Zent hag ann E-lez : C'hui a zo
benniget O pi-a! Hag ha c'hrasou kar-
get, Ave, Mari-a.

N. 7. $\frac{6}{8}$
 $\frac{8}{8}$

Speret-Santel, speret a sklerijenn,
Pliget ganehoc'h ennomp breman diskenn.
A sklerijenn kargit hor spere-jou, A ga-
rantez tommit hor c'halonou.

N. 8. $\frac{3}{8}$
 $\frac{8}{8}$

Kredi a rann, Kredi a rann Ke-
ment a ordren d'in ann Iliz, Kredi a
rann, Kredi a rann; Rag ar virionez he
unan, Eunn Doue guirion, eo a zesk d'e-
zhi Kement a ordren d'in da gredi,
Kredi a rann, Kredi a rann.

N. 8 Bb 3
bis. 8

Me a esper, Va Doue, ho kras hag
hoc'h eurusdet, Me a esper; Rag ne deuot
ket enep ho ker, Pa oc'h euz hi d'in me
promettet Pa'z int gant Jezuz d'in meritet,
Me a esper, me a esper.

N. 9. Bb 6
8

Me ho salud, korf ma Zalver, Zo dis-
kennet var ann aoter; Ennhoc'h ar bara
zo chenchet, Ha ganehoc'h e vezinn maget.

N. 10. Bb 6
8

O va Jezuz! setu deut ann amzer
Da bardouni da c'hlaç'har ar pec'her;

Bb 3
8


Nann, biken mui, bugel divad, Ne dreu-
zinn dre ar pec'het Kaloun va zad.

N. 11. Bb 6
8


Adoromp oll e sakramant ann ao-
ter Eunn Doue kuzet, Jezuz hor Mestr,
hor Zalver; Sperejou evuruz, prinset euz
he balez, Gant karantez ardant meulit-hen
da jamez, meulit-hen da jamez.

N. 12. Bb 6
8


Euz a vreman bet' er maro Meulomp
Jezuz hag he hano; Ra vo meulet e peb am-
zer Er zacramant euz ann aoter.




Doue en devez va c'hrouet 'Vit he




anaout he garet, He zervicha mad er




bed-man Ha mont eunn deiz d'ann env




ganthan.




D'ar Pantekost, ar Speret-glan A




ziskennaz e teodou-tan Var ann Ebestel



'vit gouarn I-liz Jezuz dre ho daouarn.



D'ar Pantekost, ar Speret-glan A




ziskennaz e teodou-tan Var ann Ebestel




'vit gou-arn I-liz Jezuz dre ho daouarn.




E sakramant ar Binijenn E roer




d'eomp dre ann absolvenn Graz ha pardoun




euz ar pec'het Goude ba-disiant commet-




tet, Graz ha pardoun euz ar pec'het Gou-




de badisiant commettet.



Eunn Doue a zeu d'ho kervel Ha




da ginnig d'ehoc'h pardoun ; Dire-dit d'ann




iliz santel Da rei d'ezhan ho kaloun.

N. 17. 

Poent ez eo d'ehoc'h, pec'her, Distrei
ouz ho Salver, Poent ez eo d'ehoc'h, pec'h-
er, Distrei ouz ho Salver. Digorit pel-
loc'h dor ho kaloun Da grouer ha mestr
peb-unan; Hirr-amzer zo, evel eur mig-
noun, E sko, e sko... ha na rit van.

N. 18. 

Sellit piz ouz ann taolennou Zo mel-
lezour ann eneoù, Hag a lavar da bep hi-
ni Ar virionez, heb damanti, Hag a lavar
da bep hini Ar virionez, heb damanti.

N. 19. 

Sonjit, den fazi-et, Sonjit enn Eter-
nite; C'hui, siouaz! zo dal-let Gant ann
drouk ar vanite; Sonjit e rankot mervel
Ha mont euz ar bed-ma Pa zeui Doue d'ho
kervel Abarz nemeur ama.

N. 20. 

Tavit, o tud heb kredenn, Gant ho
komzou goullo, Lezit peb sot prezegenn
Ha sonjit mad hirio : Dirak ann env ann
douar, Oll e vezimp barnet, Ann Eternel
hel lavar He c'her ne jencho ket.

N. 21. 

Mab den, sonjit enn hoc'h heur di-
ve-za Ma vezo red da viken finve-za
Gant ho pu-ez, ho pinvidigesiou, Ho kloar
dister, ho plijadurezou.

N. 22.

Selaouit, ma Jezuz, selaouit ouz ma
fedenn, Ar maro zo spontuz, em maro
deut d'am difenn. Guerc'hez Va-ri, va maim
leun a drue, Em maro gant Jezuz ro-it
sikour d'am ene.





N. 23.





Deomp d'ar garnel, kristenien, gue-






lomp ar re-legou Euz hor breudeur, c'hoa-
rezet, hon tadou, hor mammou Demeuz
hon amezeien, hor brasa mignonet, Gue-
lomp ar stad tru-ezuz m'emaint ennhan ren-
tet.


N. 24. 


Selaou, va breur ker, Buhan ia ann
amzer, Tremen ra peb tra; Nerz, madou,
iec'het, Iouankiz ha gened, Tremen ra
peb tra, Tremen ra peb tra.

N. 25.  3
Diskennomp oll, kristenien, enn i-fern
 3
da velet Do-a-re trist, estlammuz, ann e-
 3
ne-ou daonet, Pe-re zo, dre vir Doue, dalc'h-
 3
et e-barz enn tan, O veza great goall
 3
zispign euz he c'hras er bed-man.


N. 25.  6
Diskennomp oll, kristenien, enn ifern
 6
da velet Do-are trist, estlammuz, ann ene-
 6
ou daonet, Pere zo, dre vir Doue, dalc'het
 6
ebarz enn tan, O veza great goall zispign
 6
euz he c'hras er bedman.

N. 26.  6
Allaz! na c'houffe den kompren Pe-
 6
gen estlamm eo hon anken : Hor pinijenn
 6
a zo kalet... Enn han' Doue, hor sikou-
 6
ret. Breudeur, kerent ha mignonet, Enn
 6
han' Doue, hor selaouet, Enn han' Doue,
 6
hor sikouret.


N. 27.  3
A-vihanig am euz pec'het Hag of-
 3
fanset va Doue, Va e-ne paour am euz la-
 3
zet, Ah! pebez maleur d'in-me.




Pec'het em euz, ha kalz pec'het, Truez,



va Doue benniget Truez, va Doue benni-




get.




Doue, guir bried D'ann ene-ou,




C'hui 'c'h euz va c'hrouet C'hui 'c'h euz va




frenet, C'hui 'c'h euz va c'hrouet Vit ann




envou.



E-tal ho kroaz, leun a anken, Gou-




de ker braz pec'hejou; Ho treid evel ar



Vadalen A voalc'hann gant va daelou :




Je-zuz, Je-zuz, Daoust d'am buez nebeut




kristen, pardon, pardon, va Jezuz.




A-benn nebeut bloavesiou, var douar



Breiz-I-zel, Me gred e vezo rouez ann



dud fur ha santel; Ar vezventi milliget a



ia var gresk a-tao, Prest n'or bezo ken



Doue nemet ar bod-i-lío.

N. 31
bis.

A-benn nebeut bloavesiou, var douar

Breiz-Izel, Me gred e vezo rouez ann dud

fur ha santel; Ar vezventi milliget a ia

var gresk atao, Prest n'or bezo ken Doue

3

nemet ar bod-ilio.

N. 32.

Pa zaoulinomp evit kovez, Hon ene-

bour zo var e-vez Eman toskit er c'hostez

kleiz, Diouallit... braz eo he va-liz.

N. 33.

Dalc'hit sonj mad, kristenien, ez euz

eunn deiz santel A deu dre zoun ar c'hlei-

er bep sizun d'hor gervel Da vont d'hon i-

liz parrez, 'vit meuli hon Aotrou Ha gou-

lenn grasou nevez e-harz ann aoter-iou.

N. 33 bis.

Dalc'hit sonj mad, kristenien, ez euz

eunn deiz santel A deu dre zoun ar c'hlei-

er bep sizun d'hor gervel Da vont d'hon i-


liz parrez, 'vit meuli hon Aotrou Ha gou-

lenn grasou nevez e-harz ann aote-riou.

Ha goulenn grasou nevez e-harz ann ao-


teriou.

N. 34.



Kavet em euz ar peoc'h hag ann e-
rusdet, Iac'h eo breman ha laouen va e-
ne, Dindan va zreid ann ifern a zo klozet
Dreist ann oabl glaz me vel digor ann Ee.
O va Zalver, hirio, varc'hoaz ha bendez,
Ra vo meulet hoc'h hano dudi-uz ! Er misi-
on em euz kavet ar vuez... Bennoz, bennoz,
mil bennoz d'ehoc'h, Je-zuz. Bennoz, bennoz,
mil bennoz d'ehoc'h, Je-zuz.

N. 35.



Va Jezuz, va Doue, c'hui hebken a
ze-zirann, C'hui eo va c'harantez, ennoc'h-
hu ec'h esperann. O va Jezuz, O va
c'harantez, Bezit em c'halon ha bemnoz
ha bemdez.

N. 36.




Elez euz ar ba-radoz, sellit pebez
enor A ra d'eomp er Zakramant Jezuz,
hon redemptor; Eur vech evit hor prena
ez eo bet inkarnet Hag evit dont d'hor
maga ganeomp e chom bepret.

N. 37. 

Deut oll ha deut gant fe, Deut d'ar
banket pre-siuz; Galvet oc'h gant Doue
Da zibri ouz taol Jezuz; Jezuz! Baradoz an
ene Eo chom ganeoc'h noz-de.

N. 38. 

Deut, va Doue, deut da ren em c'ha-
lon, Deut d'am mezur dre ar gommunion.
Va ene paour a zo ouz ho kortoz va Zal-
ver Evel eunn douar ien skarnilet gant ann
amzer.

N. 39. 

Oh! nag hirr eo ann noz! Pegoulz
e teui ann de? Ma'z inn da zigemer Jezuz
va c'harante; Oh! nag hirr eo ann noz!
Pegoulz e teui ann de?

N. 40. 


Me'm euz prepalet eur banket, Ar pre-
si-usa zo er bed, Evit rei d'am oll buga-
le Va c'horf, va goad ha va e-ne.

N. 41. 


O kalon sakr euz va Jezuz, Kalon
meurbet karantezuz, Plijet reseo, me ho
suppli, Ann dezir am euz d'ho meuli.

N. 42. 


Meulomp oll da jamez Jezuz hag he
vadelez, Meulomp oll da jamez Jezuz hag
he vadelez. Me ho meul, o va Jezuz! C'hui
oc'h euz va c'hrouet, C'hui o'ch euz va fre-
net, C'hui am mag, o va Jezuz!

N. 43. 




Gloar da Jezuz! a greiz kaloun me ga-
no : Gloar da Jezuz! meuleudi d'he ha-no!
Hano karet, digaset euz ann envou, Evel
ar mel, ho kavan dous d'am ginou : Gloar
da Jezuz! Gloar da Jezuz!

N. 44. 

Jezuz! peger vraz ve Plijadur ann
e-ne! Pa vez e gras Doue Hag enn he
garante, Pa vez e gras Doue Hag enn he
garante.

N. 45. 

Ni ho salud, kroaz benniget, A-ziouc'h
hor penn nevez-savet, Ma talc'himp sonj,
hed hor buez, Euz bet mision er barrez.
Meulomp, meulomp a vouez huel, Jezuz hag
he groaz santel, Meulomp, meulomp a vouez
huel, Jezuz hag he groaz santel.

N. 46.  3
Ama pell diouz ann trouz Hag oll

savar ar bed, Ar mesiou am c'hleñn ker-

koulz Hag ann ha-bila doktoret.


N. 46 bis.  3
Ama pell diouz ann trouz Hag oll



savar ar bed, Ar mesiou am c'heleñn ker-



koulz Hag ann habila dokto-ret. Ama pell



diouz ann trouz Hag oll savar ar bed.


N. 46 ter.  2
Ama pell diouz ann trouz Hag oll

savar ar bed, Ar mesiou am c'heleñn ker-

koulz Hag ann habila dokto-ret.


N. 47.  2
Euruz ann hini a garo Dou-e Euz

he oll galoun hag he oll ene. Euz he

oll galoun hag he oll ene.

N. 48.  2
Setu eiz kelennadurez A ziskleriaz

var ar menez Jezuz, hor mestr selesti-el,

D'ann Ebestel, d'ann Ebestel.



N. 49.  6
Sonjomp d'ar genta dizenez Er joa e

devoue ar Verc'hez Pa oe gant ann El salu-

det Da veza mamm Salver ar bed.

N. 50. 
 Ar c'henta mis-ter truezuz A ziskouez

 d'eomp glac'har Jezuz, Beuzet enn eur c'houe-





 zenn a c'hoad Ha stouet o pedi he dad.





N. 51. 
 Er c'henta mister glori-uz, Kanomp

 meuleudi da Jezuz : Savet eo bet eveuz ar



 bez Hervez he gomz, goude tri dez.

N. 52. 
 Ni ho salud, steredenn vor Mamm da

 Zoue, leun a enor, Guerc'hez bepret dor


 ann Envou, Selaouit ouz hor pedennou.


Ton ancien.
 N. 52 bis. 
 Ni ho salud, steredenn vor Mamm da

 Zoue, leun a enor, Guerc'hez bepret dor

 ann Envou, Selaouit ouz hor pedennou.

 Meuleudi, meuleudi, meuleudi da Vari.


Chant des marins.
 N. 52 ter. 
 Ni ho salud, steredenn vor Mamm da

 Zoue, leun a enor, Guerc'hez bepret dor

 ann Envou, Selaouit ouz hor pedennou

 Ave maris stella, De-i mater alma.



N. 53. 
 Ni ho salud, o leun a c'hras, Ar

 zante-la zo bet biskoaz, Ma-ri, Ar zante-la zo

 bet biskoaz.

Ton ancien.




N. 53 bis. 
 Ni ho salud, o leun a c'hras, Ar

 zante-la zo bet biskoaz, Ma-ri, Ar zante-la

 zo bet biskoaz.




N. 54. 
 Ni ho sa-lud, rouanez ann Elez, C'houi

 zo hor mamm ar vamm, a druga-rez, Hon

 oll dousder, buez hag esperanz, Ni ho sa-

 lud gant kalz a reveranz.

N. 55. 
 Santes Ma-ri, mamm Doue, e peb am-

 zer guerc'hez, Jezuz a zo va Roue ha

 c'hui va rou-a-nez; Evel m'az eo va bar-

 ner, bezit va fa-tronez, Hag evidon dira-

 zhan bezit al-vo-ka-dez.

N. 56. 
 Me a laka va fisianz, Guerc'hez enn

 ho sikour, Akkordit d'in a-zistanz Eneb

 hon adversour; Pa skoi va heur diveza

 Me bed ho made-lez Da obteni d'in beza

 Plaset gant ann e-lez.

N. 56
his.

Me a laka va fisianz, Guerc'hez, enn
ho sikour, Akkordit d'in a-zistanz Eneb
hon adversour; Pa skoi va heur diveza
Me bed ho made-lez Da obteni d'in beza
Plaset gant ann e-lez.

Airs des Vendéens. (Tons pour les Pardons.)

N. 56
ter.

Me a laka va fi-sianz, Guerc'hez,
enn ho sikour, Akkordit d'in a-zistanz E-
neb hon adversour; Pa skoi va heur di-ve-
za Me bed ho made-lez Da obteni d'in
be- za Plaset gant ann e-lez. Da

obteni d'in be- za Plaset gant ann
e-lez.

N. 57.

Magnificat : Ra viot, va Doue, glori-
fi-et, enn amzer, enn eterni-te! Ra
zeuio kement oc'h euz krouet da renta
gloar d'ho majeste! Kanomp, va ene, Ka-
nomp meuleudi da Zoue. Anima mea Do-
minum.

N. 58.

Evit beva gant levenez N'euz ket
ezomm aour na perlez, Nag eur c'hastell
a ve savet He gern beteg bro ar ste-
red; Dindan ar soul, enn eul lochenn,
Ar paour a c'hell choarzin laouen : Evit
Ralentir. beva gant levenez, Karit Jezuz hag ar
Verc'hez.

N. 58
bis.

Evit beva gant levenez N'euz ket
ezomm aour na perlez, Nag eur c'hastell

a ve savet He gern beteg bro ar ste-
red; Dindan ar soul, enn eul lochenn,
Ar paour a c'hell choarzin laouen : Evit
beva gant levenez, Karit Jezuz hag ar
Verc'hez.

N. 59.

Bembez, bemnoz hag e bep ti
Meulomp Mari. Pegen kaer eo ar c'hanti-
kou, Pegen euruz ar parresiou, Pa la-
var oll ar c'halonou : Meulomp Mari.




Ar voien d'en em assuri Eveuz hor




zilvidigez Eo beza d'ar Verc'hez Vari Devot



e-pad hor buez. Mari a zo mamm da




Zoue, Guerc'hez eo ar guerc'hezet; Jezuz hor




Zalver, hor Roue, Gant Mari zo bet maget.




Peger kaer ez eo mamm Jezuz! Pe-




gen dous ha trugerezuz! Peger mad ha




madelezuz! Lavar d'in-me, den ann




Arvor, Ha ker kaer eo da vag var vor




Gant he goueliou guenn-kann digor?




O va ene, kanomp bemdez Da Va-




ri meuleudiou; He oberou, he oll vuez




A zo leun a vurzudou. Gloar da Vari Ha




meuleudi, Pebez burzud evuruz! Mari




guerc'hez Ha mamm ivez, Guerc'hez ha




mamm da Jezuz.




Kaloun dous a Vari Leun a garan-



tez, Ni deu d'ho saludi Gant ann oll E-



lez. Ave, a-ve, a-ve Mari-a, Ave, a-ve,



a-ve Mari-a.

N. 64.

Dallet oamp oll ha mezvet gant ar
 pec'het, Heb aoun na mez e torremph ho
 lezenn; Ha red vo c'hoaz d'ar gurun ha
 d'al luc'hed Diskouez ez euz eur mestr a-
 ziouc'h hor penn? Truez, va Doue, Hor
 c'heuz so braz; Savit ar Frans heb dale
 Ken huel ha biskoaz, Savit ar Frans heb
 dale Ken huel ha biskoaz.

N. 65.

Guerc'hez sakr, mamm garet Breiz-

I-zel, Dalc'hit stard ar feiz koz e-kreiz

ar vretounet; Selaouit euz ann env hor
 iouadenn santel : Kato-lik ha Breizad be-
 pret, Selaouit euz ann env hor iouadenn
 santel : Kato-lik ha Breizad bepret, Kato-
 lik ha Breizad bepret. Euz ar garreg eunn
 dour burzuduz A red, a red heb e ha-
 na; Ho feunteun eo, mamm dous va Je-
 zuz, Ha c'hui lavar : It da eva.

N. 66. 


O guerc'hez Vari, leun a druez,




O pezet envor, me ho ped, Penaoz bis-



koaz den enn he vu-ez N'en deuz na




guelet na kle-vet O pije lezet enn aban-




doun Nikun a gement a zeuje D'en em




erbedi d'ehoc'h a galoun, Daoust pegen




braz pec'her vi-je.

N. 67. 


Guir vugale ar Verc'hez a dle be-




za santel Ha startaat e gras Doue bem-




dez beteg mervel; Ann dud laosk-se ne




raffent nemet fall-galouni, Penaoz e c'hel-




lent beza bugale da Vari!

N. 67 bis. 


Guir vugale ar Verc'hez a dle be-




za santel Ha startaat e gras Doue bem-





dez beteg mervel; Ann dud laosk-se ne










raffent nemet fall-galouni, Penaoz e c'hel-











lent beza bugale da Va-ri!






N. 68. 
 Mari, hor mamm garanteruz, Ah! tao-

 lit eur zell truezuz Varnomp el leac'hma

 dastumet Evit ho meuli, mamm garet.

N. 68.
 bis. 
 Mari, hor mamm garanteruz, Ah!

 taolit eur zell truezuz Varnomp el leac'h-

 ma dastumet Evit ho meuli, mamm ga-

 ret. Varnomp el leac'h-ma dastumet Evit

 ho meuli, mamm garet.


N. 69. 
 O guerc'hez Vari, va mamm ger,

 Ehan d'ho karout na rinn bi-ken, Rag


 c'hui zo ker mad em c'henver Ma venn

 goall-fallakr ma n'ho karfenn; E peleac'h

 e venn-me brema, Ma n'o pi-je ken

 a-li- ez Miret ouz Doue d'am barna Ha

 dam skei enn he vuha-negez? Ha d'am

 skei enn he vuha-negez?




N. 70. 
 Ma-ri, c'houi zo d'ann oll bec'he-

 rien Eun alvokadez dous ha mad, Grit ma

 vezint ho servi-cherien O renonz a-grenn

 d'ho goall stad.

N. 74.     






Oll vugale Adam Zo divar ar pec'h-
et, Neb hini n'eo dinam O tont ebarz
er bed : Ne d-omp ket ganet c'hoaz Ha
setu ni maro... Rag hon ene, siouaz! Zo
louz ha divalo.

N. 72.    


Kanomp eur c'hantik nevez Enn deiz-
ma kaer ha benniget, Setu ganet ar Verc'hez
E kearik Naza-reth. Eur c'hroua-dur o
tont er bed A zigas ganthan joausdet D'he


gerent ha d'ho mignounet : Merc'ihg
Joac'him hag Anna, Mari, muia-ka-ret
Doue, A ra tridal gant joa Ann douar
hag ann Ee.

N. 73.     


Kaset e voe gant Doue Ann arc'hel
Gabriel D'eur gear a C'hali-lee D'eunn ti
paour ha santel; Kaset voe da Nazareth
Gant urz da zalu-di Euz Verc'hez dous
ha parfet A ioa hanvet Mari.



Pa voe ganet Jezuz, hor Zalver,




Mari, he vamm, her maillu-raz : E Beth-




leem, enn eur c'hraou dister, Var ar plouz




hi hen astennaz. Glo-




ri-a in excelsis De-o, Glo-



ri-a in excelsis De- o.




Piou lava-ro pebez glac'har E de-



voe var menez Kalvar Tenera mamm zo




het biskoaz, P'edo he mab stag ouz ar



groaz ?




Tremenet eo ar miz santel Zo kon-



sakret d'ehoc'h, Mari, Bodet bemdez



enn ho chapel, Dous e kavemp kana, pe-



di; Pa vezer ker brao assemblez Ha red




e vije kimmiada! Perak eta eo er vuez




Hirr ann anken, berr ar jo-a? Miz maë,



kenavezo, Buhan out eat enn dro, Miz




maë, kenavezo! Buhan out eat enn dro,




Miz maë, kenavezo!




N. 77. 


Santez Anna, hor patronez, Santez
Anna, hor patronez, Ni ho salud gant
karantez. Da zantez Anna Da zantez Anna
Pelerin a ia A gav sikour ha jo-a.

N. 78. 




Sant Joseph, pried Mari, Tad ma-
ger da Jezuz, Ni fell d'eomp hoc'h e-nori,
Patron karantezuz. Mirer choazet gant
Doue D'he vab, ha d'ar Verc'hez, Bet
oc'h euz enn ho pue Anken ha leve
nez.

N. 79. 





Neb ar gar beva fur hag euruz, Ha
mervel heb spont nag anken, Da Joseph,
patron karantezuz, A dle gant feiz kas
he bedenn. Pried da Vari, mamm ha
guerc'hez, Tad mager da Zalver ar bed,
Divlam ha fidel, skouer ar furnez, He
c'houlenn en deffe bepret.



N. 80. 







Va diouallit, Elig Doue, Mirit va
c'horf ha va ene. Mirit va c'horf ha va
ene.



N. 81. 
 C'houi pere zo kristenien, Ha na gle-

 vit-hu ket Eur c'hri zo leun a anken Euz

 pevar c'horn ar bed : Selaouit oll hor peden,

 Hor c'hlemmou true-zuz, Selaouit petra

 c'houlenn Ho preudeur maleuruz.

N. 82. *Maestoso.* 
 O tad santel, ni fell d'eomp oll ple-

 ga Dindan ho torn savet d'hor benni-ga,

 Ni roio d'ehoc'h, evit harpa ho tron, Hon

 aluzenn, hor breac'h hag hor c'halon.
Dolce. 
 Ar Pab, er skol gant ar Speret-Santel,

 A zo e penn ann eskibien fi-del; Komzou


 ar Pab a verk ar guir gredenn, Galloud

 ar Pab a c'houarn peb kristen.

N. 82 *his.* 
 O tad santel, ni fell d'eomp oll ple-

 ga Dindan ho torn savet d'hor benniga,

 Ni roio d'ehoc'h, evit harpa ho tron, Hon

 aluzenn, hor breac'h hag hor c'halon. Hon

 aluzenn, hor breac'h hag hor c'halon. Ar

 Pab, er skol gant ar Speret-Santel, A zo

 e penn ann eskibien fidel; Komzou ar

 Pab a verk ar guir gredenn, Galloud ar

 Pab a c'houarn peb kristen.

N. 83.

Eunn deiz Jezuz a velaz var mor
 Jenezareth Simoun hag he vreur Andre
 a ioa o klask pesket; Ganen-me deut, e-
 mezhan, laoskit ar pesket mutt; C'hui vo
 c'hoaz pesketourien, mez pesketourien
 tud. Per eo sturier ann Iliz hervez komz
 hor Zalver, Hag ar Pab a zo breman
 en deuz galloud sant Per.



TABLE

N ^{os} des Airs.	Pages des Cantiques.
31 — A-benn nebeut bloavesiou.	57
11 — Adoromp oll.	28
26 — Allaz ! na c'houffe den kompren. . .	50
46 — Ama pell diouz ann trouz.	83
50 — Ar c'henta mister truezuz.	90
27 — A-vihanig am euz pec'het.	51
60 — Ar voien d'en em assuri.	102
59 — Bemdez, bemnoz.	101
81 — C'houi pere zo kristenien.	131
33 — Dalc'hit sonj mad, kristenien. . . .	61
64 — Dallet oamp oll.	108
14 — D'ar Pantekost, ar Speret-glan. . .	31
23 — Deomp d'ar garnel.	46
25 — Diskennomp oll, kristenien.	48
13 — Doue en devez va c'hrouet.	29
29 — Doue, guir bried.	53
37 — Deut oll ha deut gant fe.	67
38 — Deut, va Doue.	69
36 — Elez euz ar baradoz.	65
5 — En em gonzolit, evit mad.	17
51 — Er c'henta mister gloriuz.	91
15 — E sakramant ar Binijenn.	32
30 — E-tal ho kroaz, leun a anken. . . .	56
4 — Eunn arc'hel a berz ann aotrou. . .	16
83 — Eunn deiz Jezuz a velaz.	135
16 — Eunn Doue a zeu d'ho kervel. . . .	33

3 — Eunn Doue hebken a adori	7
47 — Euruz ann hini	85
12 — Euz a vremen bet' er maro	29
58 — Evit beva gant levenez	100
43 — Gloar da Jezuz	76
65 — Guerc'hez sakr, mamm garet	109
67 — Guir vugale ar Verc'hez	111
44 — Jezuz ! peger vraz ve	77
63 — Kaloun dous a Vari	106
72 — Kanomp eur c'hantik nevez	118
73 — Kaset e voe gant Doue	120
34 — Kavet em euz ar peoc'h	62
8 — Kredi a rann	26
21 — Mab den, sonjit	44
70 — Mari, c'houi zo d'ann oll bec'herien	114
68 — Mari, hor mamm garantezuz	112
56 — Me a laka va fisianz	95
9 — Me ho salud, korf ma Zalver	27
40 — Me'm euz prepart eur banket	70
1 — M'hoc'h ador, ma Doue	3
42 — Meulomp oll da jamez	75
79 — Neb a gar beva fur	130
6 — Ni ho salud gant karantez	18
45 — Ni ho salud, kroaz benniget	81
53 — Ni ho salud, o leun a c'hras	92
54 — Ni ho salud, rouanez ann Elez	93
52 — Ni ho salud, steredenn vor	91
66 — O guerc'hez Vari, leun a druez	110
69 — O guerc'hez Vari, va mamm ger	113
39 — Oh ! nag kirr eo ann noz	69
41 — O kalon sakr euz va Jezuz	73
71 — Oll vugale Adam	115
2 — O Tad, Mab ha Speret-Santel	18

82 — O tad santel	134
62 — O va ene, kanomp bemdez	105
10 — O va Jezuz	28
32 — Pa zaoulinomp	59
74 — Pa voe ganet Jezuz	122
28 — Pec'het em euz	52
61 — Peger kaer ez eo mamm Jezuz	104
75 — Pion lavar	123
17 — Poent ez eo d'ehoc'h, pec'her	34
57 — Ra viot, va Doue, glorifiet	97
77 — Santez Anna, hor patronez	127
78 — Sant Joseph, pried Mari	128
55 — Santes Mari, mamm Doue	94
22 — Selaouit, ma Jezuz	45
24 — Selaou, va breur ker	47
18 — Sellit piz ouz ann taolennou	36
48 — Setu eiz kelennadurez	86
19 — Sonjit, den faziet	37
49 — Sonjomp d'ar genta dizenez	89
7 — Speret-Santel, speret a sklerijenn	26
20 — Tavit, o tud heb kredenn	39
76 — Tremenet eo	126
80 — Va diouallit	131
35 — Va Jezuz, va Doue	64

